

*Varia***CANTIC****EN HENOR****DA INTROUN VARIA MENEHOM****E parrez Plodiern.****DISCAN :**

Introun Varia Menehom,
 Euz ho sicour ni'r beuz ezom ;
 Pedit evit ho pugale
 Jesus, ho Mab, hor guir Doue.

1.

Evel eun tour var an huel
 'Zifen ar vro pa vez brezel ;
 Ho chapel, Mari, zo savet
 'Vit hon dioual dious drouc bepret.

2.

Pa deu ar gurun da grozal,
 Gant dudi e velomp ractal
 Oc'h ar menez en he za sounn
 Ti hor mam ger hag hor Introun.

3.

Ho pugale, a dost, a bell,
 A zired gant feiz d'ho chapel ;
 'Vel ma'z oc'h en ênv gallouduz,
 Bezit evitho truezuz.

4.

Ar c'hrouadur en he gavel,
 'Vez goestlet deoc'h, o mam Zantel ;
 Grit dezhan bale dre'n hent mad
 Hag heul ato Jesus ho mab.

5.

An den yaouank e creiz ar bed
'C'houlén sicour pa vez tentet ;
Sellit neuze, mam a druez,
Sellit outhan gant carantez !

6.

Ar pec'her paour en he anken
Gant fisians 'ra deoc'h he beden ;
Pedit, Mari, pedit ho Mab
Da rei dezhan pardoun timad !

7.

Pa vez ar mor braz e furol,
Tentral an noz, an avel fol.
Ar martolod', gass he speret
Varzu ennoc'h, mam benniget.

8.

Ar martolod en deuz envor
'Z oc'h hanvet stereden ar mor ;
Grit n'ho pedo ket en aner,
Hen diouallit'barz en danjer !

9.

Bezit ive leun a drue
Evit he dud, he vugale,
A zo ho c'haloun en enerez
O sonjal er martolod kez !

10.

Ar zoudard, kent mont d'ar vrezel,
D'ho saludi deu d'ho chapel ;
Ha pa vez eat pell diouz he vro,
Ouzoc'h e c'houlén an distro.

11.

Astennit ho torn benniget
'Vit hen dioual dioc'h drouc bepret,
Ma c'hello c'hoaz abarz mervel
Dont da zaoulina d'ho chapel !

12.

En he beden diouz ar mintin
Al labourer var he záoulin

Ne ador morse e Zoue
Eb caout sonch ac'hanoc'h ive.

13.

An ezomec en he lochen,
Ar reuzeudic en he anken,
An den a boan en he labour,
A c'houlen bemdez ho sicour.

14.

An nep zo skøet gant ar c'hlenvet
A c'houlen ouzoc'h ar iec'het ;
Pe, mar guel ez eo red mervel,
E c'houlen eur maro santel.

15.

Hag ar bugel kez emzivad
Zo er bed-ma eb mam na tad,
A deu da zec'ha he zaëlou
Pa zonch'n deuz eur vam en envou.

16.

Ken paour eta, ken pinvidic,
Tud eüruz pe dud reuzeudic,
En em erbedomp en eur vouez
Ha gant fisians ouz ar Verc'hez !

17.

Ia, Guerc'hez, varzu ho tron
Ni zavo bepret hor c'halon,
En hon labour pa vimp scuizet,
En hon ene pa vimp tentet !

18.

Ha ma teuffe an drouc-speret,
Ar c'hic, pe ar bed milliget,
Da rei sicuas ! lamm d'hon ene
Ha d'hor pellaat dioc'h hon Doue ;

19.

Ma teuffemp da fallgalouni
Ha dre'r pec'het d'en em zaotri ;
Ouz ar menez ni a zello
Ha fisians ni a gemero.

20.

Hag oc'h ilis, Guerc'hez Santel,
Ganeompni oll gaelet a bell,
A ziskouezo d'hor c'halounou
Heul adarre hent an envou.

21.

Ho mab, gueich all var an douar,
Savet er groaz var ar C'halvar,
En deuz da Zone gounezet
Calounou an dud caledet.

22.

O pet sonch, Guerc'hez benniget,
Var ar menez e voac'h hanvet
'Vit beza d'an dud malheüruz
Eur vam sur d'ho c'hass da Jesus.

23.

Grit eta divar ar menez
Varnomp oll eur zell a druez ;
Bezit hor mam evit ato
Brema hag en heur ar maro !

24.

Hon tadou coz, ar Vretounet,
Ar chapel-ma deoc'h, d'euz savet ;
Grit ma vimp bepret dre hor feiz
'Veldho guir vugale da Vreiz !

Respount ar Verc'hez.

Va bugale, sellit huel,
Var ar menez ous va japel ;
Euz va sicour m'oc'h euz ezom
Deuit da japel Menehom.

Persoun ha Cureet Plodiern.

Permis d'imprimer.

Quimper, le 18 mars 1870.

J. JÉGOU, *Vicaire gén.*